

Doubt - Brest 2/18/81

CHANSON NEVEZ

**Composet gant eun den yaouanc, eus a bares Briec, voar sujet e Vestrez
pehini e c'har gant eun amitie barfet.**

Var eun ton nevez

Chilaout eur chanson, so nevez composet,
- Pehini zo savet, e mil eiz cant naontec ;
- Savet gant eun den yaouanc, er blaves-man present,
- En deus laquet e speret, da re garout e c'hoant. -

Nac ebars e Briec, er blaves-man present,
- Un dra melconius etre daon zen yaouanc,
Pere dre amitie, o devoa desiret
- En eil d'eguille, vezent bet daou bried.

Evel d'or bar avel, erruas promptamant ;
- Bars er proposiou caër, voat bet deut chanchamant,
A ne sonjet dean, e voa sur a fidel *bet*
- A so bet trahisset, ya, n'en deus quet pel

Tud ar plac-man a so, eus e dud a loçanç,
Graç deo da brospéri, ebars er Brovidanç ;
Ma vuelfeinthep-dale, an daou bried fidel,
Ebars en o jardin, fleurio caër o sevel.

Me meus choaset eur vestrez. *a zo* d'am fantasi
- Pehini dre e guenet a so deut d'am charmi,
Ganti² ma an alc'houeou eus ar zor ma c'halon,
Pehini¹ or groa contant, hon daou en pep fécon.

- E bleo so allaouret, melen e sint friset,
- E anal adorabl, evel pa ve musquet,
- E daouarn so melet gant ar glas hag ar guen,
- E bisach zo graet, evel d'or berlesen.

- E muzellou so douç, douç evel ar mel pur,
E anal adorabl evel d'ar surnatur,
E daoulagad a vrill, evel diou stereden,
E gousouç a so caër, evel d'eur berlesen.

E mouez so ravisant, e speret angelic,
A laca rivierou da zanzal manific,
- An oll douar a saillo, ar pesquet a lampo ; -
Hac ar vartolodet en ho lest a zanso.

- Ma mestrez a so caër evel ar bleu, er spern guen ;
E diou chot a so ru evel da ziuou rosen ;
- E c'hyenou so caër, quer braz ez int pinteç,
- Dridal ra va c'halon, na demeus e guelet ;

Dridal ra ve c'halon na demeus e guelet ;
- Mar fell dec'h goud piou eo a TINIC a zeo hanvet
Balamour ma credan, on gant Doue inspiret,
Nac evit e c'haret gant amitie barfet.

Me meus caret va mestres ha e c'haro bepred,
A me e c'hurunfe, ma ve din permetet,
A me e c'hurunfe, ma ve din permetet,
- Quer caër e c'havan, evel an eol biniguët.

E mamm zo quer charmant nac ebars ar bed-man,
Hi a garan certain, vel va mamm va hunan,
- Balamour ma e hi, e deus laquet er bed,
- Ur plac'hic yaouanc flamm, pini gar-an parfet.

Tinic a so quer coant vel d'ar ros er bed-man,
Hounes, a dra certain, a blich d'an dud yaouanc,
Balamour de furnes, hac e santimant vad,
N'em deus er baros, vel dei quen agreabl.

Re c'hoar demed a so eur vreg fur a prudent
- O breur a zo ivez eun den yaouanc vaillant,
- A tout e oll guerent so tud a lignez vad, -
Deut oll do imita, gant o exemplou mad.

Doue² neus crouet gue, nac ebars er bed-man ;
Hag e ve florissant, pa ve deut ar mis-man ;
Calon an dud yaouanc, so ivez memez-tra
Pa ve deut ar mis-man, a ve carguet ar joa.

Pa m'em em c'hamp a goste, o sonjal bars er bed,
Me glev eur voesic secler a droubl va speret,
Ma teuis da sonjal, pe c'hlevis o cana,
Voa un eostic, pe eur voenus, pe ma mestrez Tina.

Assata va mestrez, avanç a ran en oad,
- Bez a zo eun amzer, evit ober pep tra ;
Mar be contant Doue, ni allo assembles ;
- Caer o devez an dud, o trouc presegueres.

- Goal Doue or c'hunduo, lec'h man e volonteç
- Caer o devez an dud, o trouc presegueres,
Domach a rel a reon, hini tam na vouelont,
- O trouc predi bemdeis doc'h eme a deoc'h enont.

- Ganti ma an alc'houe eus a zor va halon,
ni e deus hi digor, d'ar Verc'hes on itron,
Hi e deuz hi digor, d'ar Verc'hes on itron,
Evit antren enni, en e fossession.

Mari a Sant-Joseph, voent o daou assembles,
En devoe amitie, an eil evit eguiles,
An dra-se so caus, a meus laquet em speret,
- Da garout eur plac'hic, martese n'am c'har quet.

- Quemenn ma e c'haran, ne oufe den laret,
Me garfe e dougen en touez an alet,
A neuze pa vem ed ebars er barados,
- An dud malicius n'antrefint quet er gos.

Ma vezimp unisset, dre ar c'hraç a Zoue,
- Ne gafomp quet an amzer, hiroc'h evit eun de,
- Quen a vo deut an heur, da vont eus ar bed-man,
Pa zeuint da vervel, mont a dare gantan

Me bresantfe dei eur boquet, ma ve permetet din,
Pehini e ma c'halon, ne gar den nemeti ;
Mes ma na bermet quet, nac o queren ganoc'h
Adieu, er barados, quenavo a laran d'eoc'h

An teot malicius so caus a gals a gol,
Quement e so né, ma reont drouc ar bed-oll,
Ma allen commandi, ebars er jaoustet,
Gant ho amission, ne alfe d'en monet.

Mes gouzout eo ran, ambition so bzas,
 Heunes so eur pehet, ha ne huitait quet c'hoas,
 E touez ar gueren memeus a re dosta,
 -A ve an amissiod a vechou ar goassan,
 -Vrzon-ma zo zavet, certain a zo guir,
 -Zo zaet d'eun den yaouanc nalquet caout e zezir
 A balamour dan dud gan ho ambition
 So o ampech anean nac ebars er e'hanton.
 -Marteze lod a c'hoarso, voar sujet ar son neve
 C'hoarin ar pez a garfont, na rin'quet a boan dime,
 Lod a ve o c'hoarzin, na voar o sotonî,
 A bel al oc'h ober goab anezo e mon in.
 -Ma clefe or Roue, quellou eus ar plac-se
 A zeufe da Vriec, gantan eur messenger,
 Da brononç ar c'hellou, enep d'ar plac'h yaouanq,
 Evit ma tisabus, qement an deus dei c'hnaht,
 -Adieu, melezonr caër, adieu, tremen amzer,
 -Mont a ran Guengamp, en eun dezert a gaer,

-Ma malos d'ar goal deot, vern quet piou a zisput,
 -Ma c'halonie a ran ar goal deot ra vo mud.
 Ma fel dec'h gout ha clevet gant pïone rson-mao gret,
 Gant eur baysan yaouanc, eus ar bares Briec,
 Gant eur paysan yaouanc, eus a draou ar bares,
 Hennes en daus-hi savet, goude coan eur nosves.
 Mes ma zo unan benag, barz e compagnoues,
 Hac en defe desir da c'hout piou eo henes,
 Eo eur paysan yaouanc, eus a draou ar cresquer,
 Mar fel d'oc'h gout piou eo, c'houi c'halvo an eo Par.
 Assa compagneuz, a c'houlennan,
 Ma n'en deo quet grêt ervad ar chanson-man ;
 Me son eur den yaouanc, ne meus quet a speret,
 -Difaiet a c'hanou, elec'h ma zon faiet
 Clevet a ret breman, cetu a nei ar fin,
 C'houi a lezo anei, me ne buzoc'h quet quin,
 A nep a gavo dean, n'en de quet doneat
 A gomposo eun all, hac a vo agreabl.

KANAOUEN AN DURZUNEL

Calz 'amzer a meus kollet
 O furchal a c'hoajou,
 Vit surpren eun durzuuel
 Kousket var a brakou
 Dévet a meus ma amors,
 Ha tennet a meuz fall,
 Achapet an durzunel
 Hanijet er c'hoa all. (bis)
 Dious ann noz hag ar mitin,
 O klevet lapouset
 O kana, o fredonin,
 D'ha vek ar gwez pignet,
 Na neus niken anezo
 Hag a bik ma c'halon,
 Evel moez eun durzunel
 O welan d'he mignor.
 Hirvoudin a ra noz de
 Gant ar boan, ar glac'har,
 Evel eun intanzez paour
 Kollet ganti he far,
 Na neus nikun anezo
 Hag a bik ma c'halon
 Evel moes eun durzunel
 O welan d'he mignon.
 Petra durzunel iaouank,
 A dourmant d'ha galon!
 Kollet a meus amezi,
 Ma fidellan imignon ;

Ma na zo eur chasseour
 Da ober din mervel
 Me varvo gant ar glac'har
 Da va mignon fidel.
 N'eus na zouten, na remiet,
 Na konsolation,
 Kapabl da zont da galmin
 Tourmancho ma c'halon
 Trec'het oun gant ar glac'har,
 Mont a ran da vervel,
 Mez na varvin ket kontant,
 Ma na vavan fidel.
 Guelet a meus o vervel
 An durzunel iaouank
 Dizec'het eo ma c'halon
 Gant ar boan, ann tournant.
 Enn he c'huanad diveza
 Enn deus c'has repete
 Ha ma Mignon fidel !
 Raktal eo tremenet.
 Melezour scler ha brillant
 Demeus ar fidelite,
 Ar model ar sinseran
 Demeus ar garante.
 Nan na varvin ket kontant
 Ma na varvan fidel,
 Birviken na zizonjin
 Maro ann durzunel.

Oh sa guir

Lanhuon, en ty intanzez ar Goffic, levrer.

(1) Douc s'ecriveu strophes de 4 vers de 13 syllabes